

Berthou :

(Alc'houeder Treger) Pleuvihan (1861) – Pleuvihan(1933)

Kevrin Barzed Breiz, pe Reizadur ar Werzoniez vrezonég, bet embannet e 1912.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Levezonet eo an oberour aliez gand ereadurez ar galleg.

Viou-koukoug ha faziou kemmaduriou a zo er skrid orin.

Geriou galleg (troidigeziou) a zo er skrid orin. Lakaet int bet amañ.

Poatie, an 12^{ved} a viz Mae 1912

Kenvreur ha kenvroad ker,

*Levenez vraz am-eus bet o weled ho levrig war ar werzenn e brezoneg an amzer-vremañ.
C'hoantaad a ran e ve prederiet hag heuillet ho kenteliou fur gand kalz a lennerien, evid mad an oll ha
brud on yez kaer karet.*

Deoh a wir galon,

Emile ERNAULT.

KEVRIN BARZED BREIZ

I

Petra eo eur Barz hag ar varzoniez

1. An ano a Varz

1. N'eo ket a-walh sevel gwerziou ha rimadellou evid beza eur barz. Red eo kaoud eun emskiant keltieg ha beza bleniet gand spered ar ouenn. Kement-mañ a zo bet disklêriet berr-ha-berr gand Yann ar Fusteg (Lemenig) : *Eur barz, emezañ, a zo eur Helt emskianteg ha galvet.*
2. Galloud a reer eta beza eur barz heb ober gwerziou. Galloud a reer ivez ober gwerziou heb beza eur barz.
3. Gwechall-goz, e-touez ar Gelted, pa oa birvidig ar spered keltieg, an darnvuia euz ar re a zave gwerziou a oa gwir varzed.
4. Abaoe, pa'z eo bet eet da goll ar spered barzeg, ha zoken ar spered keltieg, ez eus dalhet da rei an ano a varz da veur a rimadeller ha ne oa ket dellezeg da zougen beh an ano kaer-mañ.

2. An Awenn

5. An Awen eo lodenn an oll mennoziou kaer a zo bet roet da bep krouadur o tond er bed hag a zo bet kresket gantañ e-pad e vuhez.
6. Peb den en-deus eun awen disheñvel diouz awen an dud all.

3. Ar varzoniez

7. Ar varzoniez ez eo an ijin-kaer e hell an den, drezañ, rei da anaoud d'an dud all e awen uhel gand sikour geriou ar yez, da lared eo rei d'an dud all doare euz ar mennoziou kaer a zo kuzet en e spered.

4. Ar Barzoneger

8 Ar barzoneger ez eo an hini a zo gouest da zavel barzonegou, petra bennag ne ouezfe ket lakaad aneze dre skrid.

9. Eun den diouizieg a hall beza eur gwir barzoneger. Gweled a reer bemdez mesaerien, micherourien, kouërien dizesk, o sevel barzonegou awenet kaer. Med mar deu gante da vad eur werzenn bennag, pe eun nebeud gwerzennou zoken, ral ez eo gweled o barzonegou divlamm penn-da-benn, dre ma vank deze ar ouiziegez.

5 Ar Werzoniez.

10. Ar werzoniez ez eo an ijin kaer a ro d'ar mennoziou barzeg ar gemmpennadurez, eun hesoniez, disheñvel diouz hini ar homz-plên hag a zo reizet gand lezennou diouti heh-unan.

5. **Ar Gwerzonier.**

6. 11. Ar gwerzonier ez eo an hini a zo desket d'ober gwerzennou reizet gand lezennou ar werzoniez.
12. Ar varzoniez hag ar werzoniez a eta disheñvel.
13. Eun den gouizieg a hall ober gwerzennou reiz, hervez lezennou ar werzoniez, heb beza dellezeg da zougen an ano a varzoneger ma n'ez eus ennañ awen eur barzoneger.
14. An hini n'eo ket ganet barzoneger ne vezo biken barzoneger, kaer en-devo poania war ar vicher.

7. **Ar Varzoniez Pobleg.**

15. Ar varzoniez ne vez ket reizet gand lezennou ar werzoniez a vez anvet ar varzoniez pobleg. Homañ ne gav he leh nemed el Lizeradur uhel.

8. **Ar Varzoniez Uhel.**

16. Pa vez reizet ar varzoniez gand lezennou ar werzoniez, ar varzoniez a gemer he leh e-barz al Lizeradur uhel.
17. Ar skrivagner a zo awenet kaer hag a zo gouizieg war lezennou ar werzoniez, a zo gouest da labourad war ar werzoniez ha d'ober barzonegou meur.

9. **Ar Barz.**

18. Eur Helt hag en-deus, war eun dro, emskiant eur barz, awen eur barzoneger ha gouiziegez eur gwerzonier a zo gouest da honid brud kaer ar varzed koz. Da henez e heller rei an ano a varz. Rag henez a gav en donder e awen, en elvennou e galon hag en ijin e spered, ar geriou a zo gouest d'ober d'an dud all santoud pezh a zant eñ e-unan. Barreg eo da lakaad ar mor da drouzal, an avel da hweza, an douar da grena, an evned da gana, an dour da redeg.
19. Ar Vreiziz – evid lavaroud gwir, ar Gelted oll – a zo, ar peurvuia, ganet gand eun awen barzoneg. Pezh a ar dienez da veur a hini ez eo ar ouiziegez hag ar studi, evid beza, war eun dro, barzonegerien ha gwerzonerien a dalvoudegez.

II

Savidigez ar werzenn

1. **Ar Werzenn.**

20. Ar werzenn a zo eun arroudennad geriou stag an eil ouz egile gand eur seurt kan-koroll¹ reizet hevez eun nebeud lezennou a vezo komzet anezo amañ pelloh.
21. Ar werzenn a zo eta eur seurt kan.
22. Evel ar sonadur, ar werzoniez a dle beza savet evid beza selaouet ha nann evid beza sellet.
23. Eur werzenn greet mad a dle ober plijadur da skiant ar hleved.
24. Al liver a dle labourad evid ar gweled, ar sonader hag ar barz a dle labourad evid ar hleved.

2. **An Taol Mouez.**

25. En peb ger, sellet ennañ e-unan, distag diouz geriou all ar frazenn, ez eus eun taol-mouez (accent).
26. Med pa zeller ouz ar ger e-barz ar gomz, da lared eo hag eñ stag ouz ar ger e-barz ar gomz, da lared eo hag eñ stag ouz ar geriou all, an taol a hell cheñch a leh.

3. **An Taol Komz-Plên**

27. E-barz ar homz-plên e kaver taoliou anvet taoliou komz-plên². (accenr oratoire).

4. **An Taol Kan-Koroll.**

¹ kan-koroll : mentadur.

² taoliou komz-plên : pouez-mouez prezeg.

28. E-barz ar werzenn e kaver taoliou anvet taoliou kan-koroll, pe taoliou barzoneg³, (accent poétique), hag a zo disheñvel diouz re ar homz-plên.

29.

30. E-barz ar frazenn-mañ :

Nag a blijadur am-eus o tebri bara !

e kaver taoliou war ar geriou *plijadur*, *tebri*, ha *bara*, med n'ez eus ket etreze eur han-koroll ha kaer he-deus ar frazenn-ze kaoud daouzeg silabenn, evel an hini a zeuio amañ war-lerh, n'ez eo ket eur werzenn. Komz-plên ez eo, netra ouspenn.

Setu amañ ar frazenn all a zo enni ivez 12 silabenn :

Ya, dem oll d'an iliz 'vid azeuli Doue.

Hogen homañ a zo eur frazenn werzennet. Ar skouarn a ra raktal disheñvedigez etrezi hag eben.

31. Setu amañ eur frazenn all a zo ivez enni 12 silabenn :

Arzur, roue kadarn, te n'out ket c'hoaz maro.

Er homz-plên setu amañ peleh ema an taoliou :

Arzur, roue **kadarn**, te n'out ket c'hoaz **maro**.

Hogen an taoliou a cheñch a leh pa lavarer ar frazenn-ze evel gwerzenn :

Arzur, roue **kadarn**, te n'out ket **c'hoaz maro**.

5. An Arsav.

32. Pep silabenn a dle beza sellet evel eur gammed⁴ (pied, e galleg). E-barz ar werzenn a zo aze uhelloh ez eus eta 12 kammed. Hag evel ma weler, darn a zo hir, darn a zo berr. War ar hammejou **zur**, **darn**, **c'hoaz**, **ma**, e chomer pelloh eged war ar re all.

33. Ar zilabenn hir a vez anvet arzav.

34. Seul-vui e vez arzaviou hir e-barz ar werzenn, seul-vui a arzaviou a vez enni, ha seul astennetoh en em gav ar werzenn-ze en lavar.

35. Setu amañ diou werzenn : an hini genta a veza lavaret eun hanter buannoh eged an eil dre ma'z eus nebeutoh a arzaviou enni ha dre ma'z eo berroh an arzaviou :

Enebourien **Arzur**, kerzet **oll** d'ar **maro**.

Arzur, Roue **kadarn**, **Arzur**, n'out ket **maro**.

6. Ar Rann.

36. Ar rann⁵ (césue) ez eo an troh greet e-barz ar werzenn goude eun nebeud silabennou evid merka ar han-koroll.

37. E-barz ar werzenn-mañ, a zo enni 12 kammed, ema ar rann goude ar c'hwehved kammed :

6+6 An noz ivez, siwaz ! a zo war ma halon

(Jaffrennou –Taldir)

38. Setu amañ diou werzenn a 10 kammed e-barz an hini genta ema ar rann goude ar pevarved kammed, hag e-barz an eil ar rann a zo goude ar c'hwehved :

6+6 : 'Mesk an deliou / al laboused laouen.

6+4 : A vouskane flour-flour / o hanaouenn.

(Lec'hvien)

39. E-barz ar werzenn all-mañ, 10 kammed enni ivez, ar rann a zo goude ar pempved kammed.

5+5 O ti benniget / ti ma herent koz !

(Taldir)

³ taoliou barzoneg : pouez-mouez barzoniel.

⁴ eur gammed : "pied" e galleg.

⁵ Ar rann : troh-gwerzenn.

40. Galloud 'reom lared ez eus evid ar gwerzennou a10 kammed tri leh da lakaad ar rann : goude ar pevarved kammed, goude ar pempved ha goude ar c'hwehved.
41. E-barz ar werzenn a 12 kammed hag e-barz ar re a 13, 14, 15, e heller kaoud daou rann.
42. Rei a refom amañ eun nebeud skweriou euz ar werzenn a 12 kammed a zo greet kalz anezi. Merket ez eo ar rannou hir hag ar rannou berr.

6+6 War galon / ma mamm Breiz / me a fell din / mervel.
 4+4 War galon ma mamm Breiz-Izel / me a varo.
 4+4+4 O Breiz-Izel /, war da galon / 'fell din mervel.
 3+5+4 Evidout, / Breiz-Izel / ma mamm / me a varvo.
 2+6+4 O Breiz ! / me a fell din mervel / war da galon.
 3+3+6 Breiz-Izel, / evidout / me a garje mervel.
 6+6 Felloud / 'ra din / mervel / evid / ma mamm / garet.
 6+3+3 Fellou / 'ra din / mervel / evid Breiz / ma mamm-vro.

43. Diwar gement-se e weler ez eo posubl kaerraad ar werzenn, unvani ar geriou hag ar han-koroll gand ar mennoz en eur dilehia ar rannou.

7. Ar Henganerez.

44. Ar henganerez ez eo donedigez an heveleb son war-lerh eun nebeud kammejou.
45. Ar henganerez a zo, koulz lared, hualou a vez lakaet d'ar gwerzennou evid staga aneze an eil ouz eben.
46. An hualou-ze, a vez anvet "rimes" e galleg, ni a roio deze an ano a glotennou.
47. Daou seurt kenganerez a hall beza er gwerzennou : ar henganerez lost, a zeu e diwez ar werzenn ; skwer :

Treh warnañ den n'hen **gallo**,
 Na Saoz, na Roman, na **Gallo**.
 E.B.

Hag ar henganerez kreiz – pe a-ziabarz- a zeu e diabarz ar werzen ; skwer :
 4+7, pe 4+3+4 Lemenik **veur**, bez ganim 'barz an **eurvad**.
 4+7, pe 4+3+4 'Barz ar glahar, 'barz ar peuh hag an **argad**.

Komz a refom pelloh euz ar henganerez kreiz bet ar hiz anezañ e-touez ar Vretoned koz, hag ar hiz anezañ c'hoaz e Bro-Geumri.

48. Ar henganerez-lost a deu d'e goulz da lakaad ar gwerzennou da gengana an eil gand eben, diou ha diou, pe teir ha teir, pe unan gand an hini a zo war-lerh an hini dosta.

8.Ar Hlotennou

49. Ar hlotennou a-ziavêz a zo eta pe klotennou plên, pe klotennou kroazet.

50. Klotennou plên : !

Amzer goz, o ! amzer zantel !
 Neuze 'welit, e Breiz-Izel,
 En pep koad, kana an evned,
 E pep kêr, kana ar Varzed.

Brizeug.

Peb mamm a lavar memez **tra** !
 Bezit unanet ha **netra**
 Ne zeu a-benn d'ho tisman**tra**.

E.B.

51. Klotennoù kroazet :
'Mêz ar houin, o ! kleze **dir**
On tadou ar Vreton**ed** !
Tan ha gwad ! brezel ha **tir** !
War ar bed ah-eus **renet**.

Taldir.

On bro a zispak he douster
Etre ar mor hag ar **mene'** ;
An êr 'zo leun deuz heh **ene**
Treh d'ar gozni ha d'an amzer.

E.B.

8. Pinvidigez ha Paourentez at Hlotennerez.

52. Ar hlotennerez a dle beza pinvidikaet kement ha ma heller.

53. Ar hlotennerez a vez paour pa vez e-barz ar hlotennoù eur vogalenn hepken o kengana euz
eur werzenn d'eben :

Stourm outañ den ne raio,
Na Saoz na Roman na Gallo.

54. Ar hlotennerez a vez pinvidig pa vez harpet ar vogalenn gand eur gensonenn :

Den na daol lagad war e **vro**
Pa n'intent den yez koz he **bro**.
Quellien.

55. Ar hlotennerez a vez pinvidig-kaer pa vez daou zon o kengana :
Da veuleudi, lann aour-**melen**
A rank diston war va **zeleenn**.
T. Le Garrek.

56. Beza e vez pinvidig-mor pa vez daou zon, harpet gand an heveleb kensonenn o kengana :
Stourmi outañ den n'hen **gallo**,
Na Saoz, na Roman, na **Gallo**.

pe c'hoaz :

Da gaerder atao a **ganin**,
Tra vo mouez ha buhez **ganin**.
T. Ar Garrek.

57. Er werzoniez halleg ez eo divennet lakaad da gengana daou verb, daou ano gwan
(adjectifs), daou ano (substantifs) dre m'ez eo re êzet ober kement-se. Med mad ez eo
lakaad da gengana eur verb gand eun ano, pe eun ano gand eun ano-gwan.

58. Mad e vefe heuill al lezenn-ze er werzoniez vrezonég rag ar barz, pa rank klask klotennoù
dibabet mad, da laroud eo klotennoù pinvidig-kaer pe pinvidig-mor, a wel neuze e
vennoziou o ledannaad ha mennoziou nevez, zoken, o tiwan en e spered.

59. Er barzonegou galleg ar brudeta hag ar gwella, e weler dalhmad ar haerra mennoziou o
tond gand ar binvidika rimerien.

60. An darnvuia euz ar werzaourien vreizad a herie ne zellont ket tost a-walh ouz ar hlotennerez. Tra-walh ez eo gante lakaad da gengana : **bro** gand **ano** ; **arvor** gand **fulor** ; **amzer** gand **ker** ; **kemered** gand **lared** (daou verb) ; **mad** gand **breizad** ; an de' gand **beure** ; **telegg** gand **biken** ; etc...
61. Ne dleer ket lakaad da gengana daou her hag o-deus an heveleb gwrizienn : **hir** gand **mênhir** ; **mad** gand c'hwez **vad**, hag all....
62. Hogen mad eo lakaad da gengana : **tremene** gand **mene'** ; **run** gand **kurun** ; **argad** gand **daoulagad** ; **telegg** gand **melen**, hag all.

10. Ar Henzonerez.

63. Ar henzonerez (allitération) eo donedigez an heveleb lizerennou pe silabennou e diabarz ar werzenn :

Ar **Vreiziz**, a-**viskoaz** da **viken**

A zo **digabestr** da **divlamm**.

E.B.

Wel eur **vagad** **vraz** a **varo** 'valeont **war** an **Arvor**.

Taldir.

Doulagad lemm-livriz vel **Iano** eul **lenn** **Ior**.

64. N'eo ket posubl rei lezennou war pezh a zell leh ar rannou, an arzaviou hir pe verr, na war ar houlz hag al leh da implij ar hensonerez. Ar gwella barner ez eo ar barz eñ e-unan. Dezañ da houzoud (hag e ra ze koulz lared heb gouzoud dezañ) penaoz ober evid displega e vennoz kaer pe e vennoz fentuz evid ar gwella.
65. Kement-mañ n'ez eo ket micher ar gwerzonier hepken, beza ez eo, dreist-oll, hini ar barzoneger awenet.
66. Er werzenn vrezoneg ez eus silabennou hir ha silabennou berr, evel m'on-deus gwelet ; hogen n'ez eus ket a zilabennou mud evel e galleg.
67. Pa zeu diou vogalenn d'en em heuill e tleer niveri daou zon : pluenn = plu + enn , koloenn = kolo + enn ; darhai = darah+i.
68. Daou zon a zo c'hoaz pa 'n em gav eur zon daou-unanet e-kichenn eur vogalenn : kanaouenn = kana + ouenn ; dihaoui = dihaoui + i ; glaoua = galou + a.
69. Meur a zon daou-unanet a zo e brezoneg, da lared eo daou zon teuzet a-gevred da ober eur zilabenn : aou, ua, ae, uo, eui, oua, etc...
11. **Gwaskedigez ha Strizidigez** (Elision et contraction).
70. E-barz ar gomz e tistager meur a vogalenn ha meur a zilabenn ; gwaska 'reer ivez meur a her, pe staga geriou etreze, beteg ma chom sklêr a-walh ar frazenn.
71. Er skritur plên hag er werzoniez ne dleer krenna na gwaska nemed an nebeuta ma heller.
72. Setu amañ eun nebeud skweriou 'leh ma weler krenna pe e penn, pe e lost ar ger, pe lemmet ar geriouigoù **a** hag **e** a-zirag ar verbou, pe c'hoaz krenna eur ger pe eur zilabenn a-bez.

'Vel eur person ez eo desket (e *lemmet*)

O dihun 'ta, koantiz Arvor. (e)

Setu 'n em werzet Tina goant. (e)
'Vel m'eo an heol benniget sklêr !(e) (a)
E-barz an tour 'vrall ar hleier. (e)
Paotred Vreiz 'zo kaled o fenn (a)
Peleh 'out o vond 'vel eun dall ? (ez) 'e).
Keid 'vo kerreg war aod ar mor (ma)
'Kano 'r barz koz dreuz e zor (e) (a)

N'eus ket eun all war an douar (ez)
Talvoudeg da skoulm' he botou (a)

La(va)ret ⁶ho pater 'raog mervel (a)
Bugale Vreiz 'gar o bro (a).

12. Al Lehdilehia.

73. Eur yez lehdilehia eo ar brezoneg, evel al latin hag ar gregaj, hag al lehdilehia-ze emañ ar peb brava anezi. Galloud a ra eta ar barz ober gand an dro-ze, gand na ray ket a-dreuz.

Lar din, anaoud a rez ar vro
Leh, war ar garreg, 'sao dero.

Heb al lehdilehia 'vez laret :
Leh an dero war ar garreg.

74 Ar werzaourien ne dleont ober implij nemed an nebeuta ar gwella euz ar waskedigez hag ar strizidigez. Dleoud 'reont ivez beza war o evez oh implijoud al lehdilehia. Deze da ziwall na vefe kavet laosk o labour.

Meskerez ar Yezou

75. Ar gwerzonier a zav eul labour en unan bennag a yezou Breiz, Kerne, Leon, Treger, Gwened, a zo aotreet da veska en e yez eur ger bennag euz ar yezou all. Evel-se 'arrufer, tamm ha tamm, da unani yezou Breiz, da vihanna yezou Treger, Loen ha Kerne.

III Niver ar Hammejou

76. Kaoud a reer er werzoniez vrezoneg gwerzennou a beb ment, da lavaroud eo, a bep seurt niver kammejou.

77. *Gwerzennou a eur hammed pe daou* ne vezint kavet nemed mesket gand gwerzennou hirroh.

78. Gwerzennou a dri gammed a vefe re verr d'en em heuill dalhmad, nemed eur c'hoari a vefe, med galloud a reont mond a-gevred gand gwerzennou hirroh :

4 Goude genel
4 Eo red mervel
3 Bez tenvel
3 'Lerh kavell
(Cuillandre) (Glanmor)

79. Gwerzennou a *bevar gammed* :

4 O Breiz-Izel,
4 Douar santel,
4 O kaerra bro !
4 'Vid da zével

⁶ La(va)ret : lavarit.

4 'Fell din mervel
4 Ivez d'am zro.
Vallée (Abherve)

Gand ar c'hweh gwerzenn-mañ e heller ober diou werzenn a 12 kammed, rannet mad ha klotennet mad ivez :

12 O Breiz-Izel, douar santel, o kaerra bro !
12 'Vid da zével, 'fell din mervel ivez d'am zro

80. *Gwerzennou a bemp kammed* a vez kavet nebeud, nemed mesket e vefent gand gwerzennou all.

5 O mor ! o mor braz !
6 Tro va bro, gouriz glaz ;
5 Rouanez dispar,
5 Kompez o voudal,
6 Eonennuz o trouzal,
5 O mor, me da gar.
(Cuillandre)

81. *Ar gwerzennou a hweh kammed*, gand ma vez berr ar strollad, a hall beza implijet d'en em heuill :

6 Ar bed all, a larer
6 A vo d'an dud dister,
6 D'ar re baour a spered
6 Nag a dud 'vo salvet !
(Prosper Proux)

82. *Gwerzennou a zeiz kammed* :

7 Me z'o eur bugelig paour
4+2 Oh hirvoudi gand enkreiz ;
4+4 Kollet am-eus gwasoh 'vid aour,
4+2 Kollet am-eus ma heiez.
(Taldir)

83. *Ar gwerzennou a eiz kammed* a zo e-touez ar re ar muia implijet. Gand ar re-mañ e heller ober gwerziou ha soniou deut mad heb meska aneze gand re all hag hep skuiza ar hlevour.

4+4 Al louarn koz bremañ 'zo pell
5+3 A gollas e lost er brezel.
8 Setu Alanig ar bourdou
3+5 Da brezeg 'eneb al lostou.
(Prosper Proux)

4+4 Arruoud rey ivez da dro,
4+4 'Vel 'arruas hini Kêr-Iz ;
4+4 Tostaad a ra Êl-ar-Marô,
5+3 Kêr an techou fall, o Par-Iz !
(E.B.)

4+4 Daoust 'vo d'ar boan, daoust d'ar maro,
4+4 Daoust d'ar gevier, daoust d'ar hañvo',
5+3 Treh da drouz ar bed milliget
4+4 Youhadenn Vreiz 'zavo bepred.
(Yann Ar Fustek)

84. *Gwerzennou a nao gammed* :

5+1 Pa oa paotr Lez-Breiz e ti e vamm,
4+5 En-devoa bet eur pebez estlamm.
(Barzaz Breiz)

85. *Ar gwerzennou a zeg kammed a zo evel ar re a eiz kammed, e-touez ar re ar muia implijet an deiz a herie :*

4+6 Dreist ar mor braz, du-ze, er gwagennou,
4+6 Me 'gleo hirio son klemmuz ar glazou...
4+6 Petra, Euziz, petra 'ra deoh gouela ?
4+6 Perag ken trist ar halonou brema' ?
(Klaoda Ar Prat)

5+5 O douster ma zi, bihanig ha kloz
5+5 Kuzet mad e-kreiz menezioù Kerne !
5+5 'Uz dit e hirvoud, en deiz hag en noz
5+5 Eun êzenn glouar a zoug mil ene.
(Taldir)

4+4+2 Keltia goz a gan he son em hreiz ;
2+6+2 O joa ! n'ez eus 'med eur galon, eur feiz,
3+5+2 En Keumri, Skos hag Iwerzon ha Breiz.
(E. B.)

86. *Ar gwerzennou a unneg kammed n'int ket nemeur implijet nemed mesket gand re all.*

87. *Ar gwerzennou a zaouzeg kammed a zo ar muia implijet hirie gand ar re a eiz hag a zeg kammed. Evel ar re-mañ o-deus eur han-koroll hag a zo deread.*

88. Dre ma heller ranna ar werzenn a 12 kammed e meur a stumm, evel ez eus bet gwelet uhelloc'h, niverenn 44, ar gwerzonier gouizieg a zo gouest da gaoud meur a dro, well pe welloc'h, da zisplega e vennoz pa ra implij euz ar werzenn a zaouzeg kammed.

6+6 Mouezig flour an avel / a voud 'mesk an deliou,
6+6 Richan al laboused / a strink 'tousez ar brankou ;
6+6 Ar mor 'zeblant kanañ / 'n eur lipad ar bili,
6+6 Ar hloh a zon en tour /... O ! na pebez dudi !
(Lec'hvien)

89. Na pebez dudi ivez selaou ar gwerzennou kaer-ze ! Setu aze peder gwerzenn hag o-deus eur han euz ar haerra. Perag ? Abalamour ma'z int rannet gand eur barzoneger awenet, en eur stumm dispar, evid rei doare e vennoz. Rag n'ez eo ket a-walh deze beza rannet 6+6, rannet int, kentoc'h, evel-henn :

8+4 Mouezig flour an avel / a voud / 'mesk an deliou,
8+4 Richan al laboused / a strink / 'tousez ar brankou ;
6+6 Ar mor 'zeblant kanañ / 'n eur lipad ar bili,
6+6 Ar hloh a zon en tour /... O ! na pebez dudi !

En tu-hont d'ar rannou braz, taolit evez ouz ar rannou bihan, ha sellit pegen disheñvel eo kan-koroll an teir gwerzenn diweza :eur burzud evid ar hleved !

90. *Ar werzenn a zaouzeg kammed en em vesk brao gand an hini a eiz kammed :*

4+8 En Lez Arzur, / dirag marheien / didrehuz,
4+4 Gwisket en dir / ha lugernuz,
6+6 E kanis Breiz /, ma bro /, gand eur vouez kalonuz.
(E. B.)

91. Ar werzenn a drizeg kammed a zo bet meurbed implijet gwechall. Bet eo ivez implijet gand ar varzed pobleg e-kerz an naontegved kantved.

7+6 Deut-hu ganin, koantennig / deut-hu ganin d'am zi,
7+6 Ne 'po mann d'ober bemdez, / bemdez 'med komañdi.
(Yann ar Gwenn).

92. Ar werzenn-mañ a zo mad da implij evid displega an darvoudou kaer. Hogen n'eo ket ken gweñv hag an hini a zaouzeg kammed :

7+6 Pa beurnijas e ene 'mêz e gorr d'an ivern,
? Ar c'hweh Chouan a oa pell euz a Vilin-Hilvern ;
7+6 Pell euz a Vilin-Hilvern, war-zu Koad-ar-Roue,
7+6 Evid konta d'o breudeur e oa veñjet o re.
(Taldir)

93. Gwechall e reed c'hoaz implij euz gwerzennou a 15, 16, 18 hag 20 kammed. Ar hiz aneze a zo peurgollet ha ne weler ket e ve ezomm ebed da nevezi ar hiz-se.

IV Strolladennou

94. Eur barzoneg a hall beza greet en eur pennad hepken pe gand eun nebeud pennadou a heveleb hirder, anvet strolladennou. Kavet e vezo amañ war-lerh skweriou a bep seurt strolladennou.

95. *Koubladenn*. Diou werzenn pep strolladenn a zo klotennet etreze :

Ouz taol 'oa c'hoaz tud an eured,
Broudig an dall, pa'z eo klevet,

Gand e gi, ar baleer-bro,
O pateri ouz an treuzo'.

-Dall ha daonet ! an aluzon
Az-po mar kanez dim eur zon.

E skeul 'n e zorn gand pep hini,
Krog an diskan war leur an ti.
(Quellien)

96. *Triadenn*. Teir gwerzenn pep strolladenn a zo klotennet etreze :

Piou 'lavar 'vezo ar galleg
A dreho war ar brezoneg,
War an derv kaled, an haleg ?

Beo mad eo Spered on zadou,
Ha keit hag ar bed e padou,
Rag mui hen karom 'vid madou.
(Luzel)

War an telennou koz 'm-eus trohet ar herden
Kerzen dir 'zo war bep telenn ;
An dir gweñv ha krenuz ne dorro birviken.

Er yez komzet gand ho kouenn-dud,

O c'hwi ar re⁷ a zav herie deuz an argad,
Kanit evid sevel ho prud.

Kalon ! wa r-zao ! Breiziz ! tra-walh skuilla daero' !...
Pa zeuio an amzer haro,
O Telenn Dir, lugern e-touez dir an Armo' !`
(E. B.)

97. *Pevaradenn*. Ar hlotennoù a hall beza plên, pe kroazet :

Petra 'zo nevez e Kêr-Iz,
Ma'z eo ken foll ar yaouankiz !
Ma klevan-me ar biniou,
Ar vombard hag an telennoù !
(Olier Souvestr)

Eun amzer a zo bet ha ne vije klevet
On touez nemed yez Vreiz : war ar mêz 'vel en kêr ;
Oll komzom ar yez koz gand on zadou komzet
En Gwened, en Kerne, Leon ha Landreger.
(Luzel)

pe c'hoaz :

Ahane 'wler ar mor glaz
Oh eoni war ar herreg,
Ar parkeier, gwer ha gwezeg,
Bete kein Bre, ar mene' kraz.
(E.B.)

98. *Pempadenn*. Amañ 'heller adarre klotenni plên pe en-kreiz :

Ar bed a zo eur skeudenn dremenuz
Hag eun draonienn a enkreziou.
Mousc'hoarz ar joa, daerou 'n Ankou klemmuz,
Liez a zo arweziou touelluz :
N'eus netra wir 'med an Neñvou !
(Taldir)

Dirag spered on Gourdadou,
A heuill ahanom dre oll a-dreuz ar hantvejou,
'Uz d'eur mênhir, gwir arouez an Hirbad,
An oll varzed, en eur bodad,
O-deus savet o dorn, prest da skuilla o gwad.
(E. B.)

99. *C'hwehadenn*. Amañ ar hlotennoù a hall beza ivez staget plên pe kroazet a-dost pe a-bell.

Eur zoñj eo kement-se bremañ ;
Na ton na son, mui ne glevan,
An ti koz paour a zo deut mad ;
Beteg ar skrill a zo tavet,
Maro gand riou 'n korn an oaled.
Ha me ne glevan ken kammed
Nemed mouez kriz an avel-yud.
(Erwan Ar Moal).

⁷ ar re : pere, er skrid orin.

100. Strolladennoù all : *Seizadenn, eizadenn, naoadenn, degadenn* : Er strolladennoù-mañ ivez, ar henganerez a hell beza lehiet e pep seurt giz :

Eizadenn :

Koz ez eo va gouenn evel ar bed
Uhel he fenn 'barz an Anken !
Gortoz a ra heb aon ebed
Ar boan a zo en he flanedenn !
Abaoe ma'z eo mibien Gomer
Pellaet an eil diouh egile,
Daou vranc eur wezenn a weler
O skuilla disheol war Mein Be.
(Abalor)

V

Barzonegoù a stumm digemmuz

101. Er werzoniez vrezoneg ne gaver ket barzonegoù a stumm digemmuz evel er werzoniez halleg.

102. Koulskoude e weler bremañ barzed o sevel barzonegoù war skwer an doare galleg a vez greet "Sonnet" dioutañ.

103. Er barzoneg-mañ ez eus pevarzeg gwerzenn : daou strollad a beder gwerzenn ha daou a deir gwerzenn.

104. Ar hlotennerez a dle beza plên pe groazet nemed eo red kaoud heveleb klotennoù e-barz an diou beveradenn euz an eil d'eben, ha kaoud ivez heveleb klotennoù e-barz an diou driadenn euz an eil d'eben.

105. *Tristidigez*

Abardaeziou ken kaer a wechall, d'ar zuliou a
Pa'z eem, en eur huñvreal, a-dreuz ar prajou glaz b
Er gwadagennoù sioul, hag e-kreiz ar hoajou, a
En eur zoñjal ennoh, va glahar a zo braz. b

Dre druez, en em guzit dirazon, bokejou, a
Rag ar gwel ahanoh hepken, bremañ, va gloaz ; b
Lugernit 'vid an neb ne skuill ket a zaelou, a
Va lezit da ouela va mignonez, siwaz ! b

Heol skeduz, en em guz a-zindan eur goabrenn c
Grilled ha laboused, lezit ho kanaouenn, c
P'em gweloh o tremen, va halon rannet oll. d

E-leh eun amzer gaer, e-leh al levenez, e
D'am spered, d'am halon, leun a dristidigez, e
E plij eun amzer du gand eun avel diroll. d

(Per Pronost)

106. Skwer urz ar gwella klotennerez evdi ar "sonnet" e galleg :

Kenta strollad : A B B A
eil strollad : A B B A
Trede strollad : C C D
Pevarz strollad : E D E.

107. Eur re bennag ne heuillont ket tenn lezenn ar hlotennerez evel m'ema uhelloh hag a lak klotennoù disheñvel en diou beveradenn euz an eil d'eben.

105. *Enez Eusa.*

E-kreiz mor brumennuz an hanternoz, kollet,
Enez Eusa, enez an euzusted, evel
En eur havell a hun... heb arzao, luskellet
Gand krozmol ar hoummou ha yud gouez an avel.

'Mesk ar reier, e nij 'uz dezo morvrini,
E vev paotred hardiz, heb aon nag an arne',
Ha merhed koant ha fur, med leun a velkoni
Ha gand broud an anken strafuillet o ene.

Rag tro-war-dro dezi ar vorgwragez⁸ daonet
A vouskan hag a chalm, dre zellou entanet,
O halonou da galz euz he mordeidi
Ar re⁹, eun deiz pe zeiz, en em daol, gand dudi,
'N o divreh 'vid gelloud (hervez an danevell)
Tañvaad eur pennadig d'o harantez marvel.

(Mathaliz).

VI

Kenganerez a-ziabarz

1.109. En tu-hont d'ar hlotennoù a-dreñv implijet herie, on tadou-koz a ree implij euz ar hlotennoù kreiz hag euz ar hensonerez.

110. Setu amañ eur skwer tennet diouz *Levr du Kervarzin* (Bro-Geumri) a zo unan euz ar hosa dornkridou bet miret dim a-dreuz an amzer :

Rac deu **ur** in en **tur** y tirran
Rac **Errith** a **Gurrith** y ar velugan
Mein winev in diheu a dygan
Moch guelher y miuer gan Elgan
Och oe **leith** maur a **teith** y deuthan¹⁰.

111. En Bro-Geumri e kaver c'hoaz ar hiz koz beo-birvidig.

2. Ar gynganedd er werzoniez keumraeg.

112. Ar Geumroiz a halv cynganedd an hual a zo lakaet da izili ar werzenn gand ar henganerez (rime) pe gand ar henzonerez (allitération), pe c'hoaz gante o-daou a-gevred.

113. Beza ez eus, hevez an Ao. Loth, daou seurt cyngneddiou ; ar *gynganedd old sain*, a lak diou vogalenn a-gevred gand eur son hepken, hag ar *gynganedd proest* en hini¹¹ ar vogalennou a zo disheñvel hag ar hensonennou heñvel e deraou ar ger, pe memez e-barz ar ger a-bez.

114. **Cynganedd old sain** (pe vocalique), ez eus daou seurt diouti :

115. *Ar gynganedd old sain rywioi*, greet gand kenganerez etre diou glotenn a-ziabarz, hag, en tu-hont, gand kenzoniri etre an eil ezel hag an ezel diweza :

Bod hynod / wiw **glod** eglwys.

⁸ : ? Marteze "ar vorgazenn".

⁹ Ar re Pere, er skrid orin.

¹⁰ deuthan. : N'eus troidigez ebed. (nag evid an traou e kembraeg, da heul)

¹¹ en hini : en pehini, er skrid orin.

116. *Ar gynganedd lusg*, greet gand kenganerez diou glotenn a-ziabarz ; ar glotenn genta a vez silabenn ar rann hag an eil a vez silabenn eil-diweza ar werzenn :

Caryat didwyll a grybwillat

117. **Cynganedd proest** (pe consonantique). Ez eus ivez daou seurt diouti.

a)118. *Ar gynganedd croes*. Kement kensonenn ez eus e-barz an ezel kenta a zo heñvel euz re an eil ezel nemed ar re a zo e diwez an daou ezel :

Dall i'm eof / dy liw e'm ewag

Yn wyrdd las liw / wrdd lwys Ian

b) 119. *Ar gynganedd draws*. A-walh ez eo staga an daou ezel gand eur gensonenn hepken :

o'r awr / i'th welais / erioed

gwr a wnaeth llewyth or gorllewin

120. Pa 'n em rannas an tri rumm breton, eme an Ao. Loth, hag a-raog, e oa diou skwer gwerzennou ar hiz aneze e-touez ar re-mañ : an hini a oa azezet war ar hensonerez, hag an hini a oa azezet war ar henganerez. Hemañ a oa deut euz ar broiou a-ziavêz.

3. Ar henganerez en Gwerzoniez an Amzer Greiz.

121. Ar Vreiziz, e-pad an Amzer Greiz, ha beteg ar XVII^{ved} kantved, da lared eo beteg ar mare ma oa kaillaret spered Breiz gand spered Bro-Hall, o-deus heuillet ar hiz koz da vihanna hini ar gynghnedd lusg. Gweled a reer kement-se el levrou-mañ :

Burzud braz Jezuz, Buez Santez Nonn, Buez Santez Barba, Heuriou brzonec, Melezour ar maro, Doctrin an Christenien, Doctrinal ar Christenien, hag en *Nouvelou koz*, labouriou skrivet e-giz ar brezoneg kreiz.

122. Lezenn ar henganerez pe ar hlotennerez e-barz gwerziou ar brezoneg kreiz a oa anavezet fall beteg diwez an XIX^{ved} kantved. An Ao. Ernault hag an Ao. Loth o-deus disklêriet al lezenn verr a reize ar hlotennerez er werzoniez-mañ. Setu-hi amañ :

123. *Ar zilabenn eil-diweza euz ar werzenn a zo klotennet dalhmad gand hini ar rannmeur : galloud a ra beza klotennet gand rannou all c'hoaz :*

Itron clouar, gwerc'hez **Mary**,

Duet guen eomp **glan** da **Bethany**.

(Burzud braz Jezuz)

Dre compassion euz ar **passion** on Roë debonner

Ez dle pep heny goelaff a devry nac en mar **tier**.

(Burzud braz Jezuz)

124. Ar houblad diweza-ze, ha meur a hini all, savet en heveleb giz, a zo bet greet gante c'hwehadennou :

Dre compassion

Ouz an passion

On Roë debonner

Ez dle pep heny

Goelaff a devry

Nac en mar fier.

Ha setu ar hlotennou a-ziabarz deut oll da veza klotennou a-ziadreñv.

125. Setu c'hoaz :

Pa deuas davet y **Gabriel** lesant sautet pa he **guelas**

Na fellas pas dan cas **astud** hep ober **brut** he **saludas**.

a zo deut da veza :

Pa deuas davet y **Gabriel**
Plesant santel pa he **guelas**
Na fellas **pas** dan **cas astud**
Hep ober **brut** ha **salud**.

126. Setu c'hoaz :

Nouel ! quenomp, joausomp **glan** ! gant debean **breman** pobl **an** bet
Greomp meleudy dan map **bihan** a zo bet **man** deem **ganet**.

deut da veza :

Nouel quenomp joausomp **glan**
Gant diboan **breman** pobl **an** bet
Greomp meleudy dan mab **bihan**
A so en bet **man** deom **ganet**.

Ha setu e kavom c'hoaz amañ al lezenn heuillet mad.

127. Skwer all :

Ha Pezr – quen buhan / pan clevas an **can** / an quoc a **can**
A techas an **ty** / gant goelvan ha **cry** / pan em **avisas**

a zo skrivet dre fazi, marteze :

Ha Pezr - quen buhan
Pa elevas an can
An quoc a canas –
A techas an ty
Gant guelvan ha kry
Pa em avisas.
(Burzud braz Jezuz).

128. Eun êsa ezu an doare klotennerez-mañ a zo bet greet gand ar barz Taldir-Jaffrennou :

War dreuzou an **ti** dister ha **disto**,
Eur barz koz **dinerz** a gane **gwerzio** ;
Mez euz e vouez **dous**, hepken laboused,
Demeuz an **dremmwel**, o tond, e **weled**.

Klevit o **tergarn**, en o daou**arn** kreñv,
'Reun an Delenn C'**hlan**, roet gand **an** neñv !
Breiz n'eo ket maro ! Breiz ne gousko mui :
He mintin 'zo **deut**. Gret he **meleudi**.

129. Mad 'vefe d'ar Varzed helao¹² hag helavar adsevel ar hiz koz-mañ, eur hiz hag a zo
gouest da rei lufr d'ar werzoniez vrezonég.

¹² helao : ?